




KANTIK NEVE ZANT ERVOAN




N'en euz ket en Breiz, n'en euz ket u-



nan. N'en euz ket eur Zant



e-vel Zant Ervoan, N'en euz ket eur



Zant e-vel Zant Er-voan.

*N'en euz ket enn Breiz, n'en euz ket unan,
N'en euz ket eur Zant evel Zant Ervoan (bis).*

N'euz ked enn Argoad na mu enn Arvor,
Kouls ha Zant Ervoan vit ann dud a vor.

N'euz ket barz ar vro, dre-oll e lerer,
Hag e ve ken mad vit al labourer.

N'euz ket kaeroc'h skouer d'ann dud a Lezen,
Evid Zant Ervoan, skouer ar veleien.

Ha d'ar bevien gez ha d'ann dud a boan,
N'en euz ket gwelloc'h evit Zant Ervoan.

*N'en euz ket enn Breiz n'en euz ket unan ;
N'en euz ket eur Zant evel Zant Ervoan (bis).*

N'euz chapel e-béd enn bro Breiz-Izel,
Evid-on ker koant ha m'e he chapel.

Mar fell d'hac'h pedi ha pedi er-vad,
Et d'ar Minihi da glask ho mennad.

Dousan, m'e pedi, pa oer trubuillet,
Elec'h ma pedaz ar Zant binniget !

Dousan m'e gwelet ar maner zantel,
Elec'h m'e ganet Zant braz Breiz-Izel !

Maner Kervazin a welaz ive
Ine Zant Ervoan o ninjal d'ann Ee.

*N'euz Chapel na ti em bro Breiz-Izel
Vel ti Zant Ervoan ha vel he chapel.*

N'en euz ket enn Breiz eunn iliz ker kaer
Hag he illiz-veur enn kear Landreger.

Evit Zant Tual, ho Tad binniget,
Otro Zant Ervoan, c'houi 'n euz hi zavet.

Eno man ho *Pe* ha n'euz ket er vro,
En efe gwelet mu a viraclo.

Me deui war-n-ehan euz a Gervarzin,
Hag e ve red d'in dont war ma daoulin.

Dister eo ho *Pe*, re dister, allaz !
Adzavet e vo kaeroc'h vit biskoaz.

*N'en euz ket enn Breiz evel Zant Ervoan,
Ken kaer hag he Ve ne vo ket unan.*

Hon Eskop neve en euz hen laret :
Ni a zikouro, vel gwir Vretoned.

Kerkoulz ha Tregrer, Goelo ha Kerne
En evo ho min barz ar Be neve.

Ha pa vo 'nn he zao, vo eur pardon kaer,
Oll iskibien Breiz barz el Landreger.

Oll iskibien Breiz gand hon Eskop-ni,
War ve Zant Ervoan, a deui da bedi.

Hon Eskop neve en euz hen laret,
Ha gant Zant Ervoan e vezo pect.

*Ha ni, Bretoned, ni lar a unan :
Bennoz d'an Eskop a gar Zant Ervoan !*

Ann otro Zant Ervoan a zo bet interret enn Katedral Landreger, dreg ar gador zarmon. Gwech-all en evoa enon eur be kaer. Hirie eo paour ar paouran : N'en euz netra ken nemet eur min ru clec'h ma oe lakeet he gorf zantel. Bretoned vad, c'houi gar Zant Ervoan ha c'houi zikouro ann otro Eskop neve da adzevel be ho Sant Binniget. Roet ar muan m'elfet, ann otro Doue ha Zant Ervoan ho peo. — Roet hoc'h ofrans d'ho person ; hen a gaso ann arc'hant da Landreger.

Neb a gano ar c'hantik-man gand doujanz Doue, a c'honeo daou-ugent devez induljanso.

Landreger, enn driouac'hed a viz Mae, 1883.

† EUGÈNE-ANGE-MARIE,

Eskop San-Brieg ha Landreger.